

O SANT STEFAN

1 O Sant Stefan, kentañ merzher,
(Oh Saint Etienne, premier martyr)
Kouezhet war roudoù hor salver
(Tombé sur les traces de notre Seigneur)
Lakit don en hor c'halonù
(Mettez profondément dans nos cœurs)
An had eus an holl vertuzioù.
(La semence de toutes les vertus)

MEULOMP A GREIZ KALON
(CHANTON DU FOND DU CŒUR)

2 Dibabet 'vit ho kalon aour
(Choisi pour votre coeur d'or)
Da servijañ taol an dud paour
(Pour servir la table des pauvres)
Grit ma vo bras hor c'harantez
(Faites que notre amour soit grand)
Evit an dud er baourentez.
(Pour les gens en état de pauvreté)

SANT STEFAN HOR PATRON
(SAINT ETIENNE NOTRE PATRON)

3 En ho komzou bannoù ar feiz
(Dans vos discours les rayons de la foi)
A lintr splann evel an deiz
(Luisent clairement comme le jour)
Grit ma paro en hor spered
(Faites que brille en notre esprit)
Ur feiz skedus 'vel ar stered.
(Une foi éclatante comme les étoiles)

4 Betek dindan falc'h ar maro,
(Jusque sous la faux de la mort)
C'hwi 'bardonas d'ar bed garo
(Vous pardonnâtes à ce monde dur)
Grit ma vo kavet hor c'halon
(Faites que l'on trouve notre coeur)
Leun a druez hag a bardon.
(Plein de pitié et de pardon)

(Ton : Ave Maris Stella – Skriver : Pierre Vincent Cariou, deus Koad-Galloù – Tr : Lukian Kergoat)